



AR VRETOUNED E LOURD



Ton : *Les Breiz.*

Rouanez Arvor, oll ho saludomp,
O Guerc'hez dinam, ennoc'h e credomp. (*bis*)

O Guerc'hez Vari, dre-holl ha bepret,
C'hui voue gant Breiziz ann *Itroun* garet.

Guechal hon tud coz, sentuz d'ho lezen,
En em vouestlas oll deoc'hui da viken.

Hag a-c'houde-vez, al le 'zo miret,
'Vel en deiz kenta ma 'ze bet touet.

Hon Arvor a vev dre ho madelez :
Ni 'zo bugale deoc'hui da jamez.

Euz ho pugale, ô Mam, clevit 'ta,
Clevit ar beden hac ar bromessa.

O Mam hor Zalver, evel hon tadou,
Ni 'ro da viken deoc'h hor c'halounou.

Mes prijit d'ho tro, arch a esperans,
Souten ann Iliz, savetei ar Frans.

Mar be ret difen he honor d'hor bro,
Ar Breizad kristen dispount a gerzo.

Dindan ho skoazel, epad ann emgann,
Soudard, martolod 'ra fae var ann tân.

Ar micherour paour, al labourer kez,
A drid ho c'haloun gant ho karantez.

Mam, roit ho pennoz deomp ha d'hon tudou,
Ha d'hor parkeier koulz ha d'hon aochou.

D'hon tiegeziou, ha d'hor bugale,
Ha d'hor mignoured 'zo er gear du-ze.

D'hor martoloded ho pennoz ivez ;
Hi gass hoc'h hano d'an Douar-Nevez.

Skuillit ho pennoz var hor soudarded ;
Rentit d'ho banniel he gloar hac he sked.


Hac hed hor buez, euz ho crassou c'houi,
Ni hor bezo sonj, ô Guerc'hez Vari.

Euz ar roc'h santel, pa vimp enn hor bro,
Ar sonj dudius ganeomp a jomo.

Endra bado 'r bruk var hor menezou,
Karantez hor Mam 'vo 'n hor c'halounou.

Rac ho pugale, ô Guerc'hez santel,
Ar c'hed dreizoc'hui ar vuez eternal.

Oll en ho kichen, en env, eun devez,
'Fell dezho beza, Mam a garantez.



Permis d'imprimer :

Quimper, le 31 Mars 1879.

J. JÉGOU, VIC. GÉN.

(TOUS DROITS RÉSERVÉS).

En vente chez J. SALAUN, Libraire, rue Kéréon, Quimper.

Quimper, typ. DE KERANGAL.